

13.

He daoulagad zo brillant evel diou stereden,
He c'hiennou zo ken kaer evel an aour melen,
He diou chod a zo henvel euz a ziou rozen rus
Pere gant glis ar mintin ve brillant hag skedus.

14.

Ebarz he c'hizou ivez hi zo vertuzus braz,
Hi zo leun a humilite hag a vodesti braz.
He c'homzou zo agreapl hag douç vel ar mel pur
E c'hlevet o kozeal me meuz kalz plijadur.

15.

Pa dosta an abardaez, ma labour achuet ;
Ma mestrez a ve ganti he fen ato stouet,
Pa zeu an devalijen hag an noz barz he c'hamp ;
Me a vel ma mestrezik oc' allumi he lamp.

16.

Etouez ar vicherourien ne neuz nikun ervad
Hag e chom ken divead en noz da labourad.
Araog m'a c'haï da repoz, me e guel o pedi
Daoulined dirak imag ar guir Verc'hez-Vari.

17.

Deuz ar mintin pa zavan me a vel ma mestrez,
Aezet var eur gador o koumanç he devez
Hag dre ma avanç an de an eol savet huel,
En eur zigor he frenest hi ra ouzin eur zel.

18.

Azalec an deiz kenta ma velan ma mestrez,
Ma c'halon neuz c'haret gant eur guir garantez.
Azalec ar memez deiz betec an deiz a c'hirio
Ma mestrez zo em spered hag em c'halon ato.

19.

Meur a vech ouz e guelet me am beuz lavaret :
Rouanez deuz ma c'halon c'hui zo ganin karet ;
Aliez me beuz pedet or Mam santez Anna,
Pedet an Autrou Doue da zon don unissa.

20.

Possubl a ve marteze a ven karet ive
Gant an hini zo em speret koulz an noz hag an de ;
Mez penaouz don da c'houzout, penaoz goulen ganti
Esperanç hag karantez evit ma zoulagi.

21.

Tri blavez zo e vevan e kichennik he zi
Heb leza bet an enor da gomzeal ganti ;
Gouskoude me am beuz gret meur a bourmennaden
O tremen e c'harz he zi nesper vit he goulen.

22.

Eur sulvez deuz ar mintin en eur vont da bourmen
Me a velaz anezi tont deuz an offeren ;
Hag me gant humilite o vont betec enni
En esper gout ar faeçon evit he zaludi.

23.

Me o salud plac'h yaouank gant guir humilite,
Rouanez deuz ma c'halon objet ma c'harante :
Kemerit mar plich ganeoc'h ganin me eur lizer
Em beuz skrivet evidoc'h abaoue pell amzer.

24.

Pa vezo lennet ganeoc'h ; mar blich d'ho santimant ;
Digasset d'in-me kelou ractal ma doucik koant.
D'an hini neuz ho karet gant guir fidelite
Digasset mar plij ganeoc'h eur gomz a garante.

25.

Cetu ama mignoned hag c'hui tud ma c'hontre
Kemen a skriven dezi ebarz ar lizer-ze.
Ar c'homzou zo var nezan a zo douç hag guirion
Deuit da glevet anezho tud yaouank ma c'hanton.

26.

AR LIZER

Pa lennecot ma lizer c'hui a vo estonet
O vel an hardizegez zo ennan comprenet ;
Mez me o ped plac'h yaouank da zom d'am excusi
Hag da veza induljant evit ma fardonna ;

27.

Rag me meuz gret kalz effort vit ho abandonni,
Neur lavaret din va-unan e vije sottoni
Da lakat barz em speret an desir d'ho karet
Pa n'em beuz ket esperanç da veza selouet.

28.

Mez netra neuz ar pouvoar da jench ar zantimant
Oc'heuz din-me inspiret gant ho krasou charmant.
Ma c'harantez evidoc'h a zo kre hag nerzus ;
Rag ze ma muia-caret va rentel evurus.

29.

Me o kar dirag Doue deuz a greiz ma c'halon ;
C'hui eo ma c'hountantamant, ma c'honsolation.
Evit diskouez peguemen o karan ma mestrez
Deuz secrejou ma c'halon kemerit an al 'c'houez.

30.

Ne neuz nikun nemedoc'h an defe ar pouvoar
Vit ma renta evurus aman var an douar ;
Rac ze ta ma mestrez ker deuit gant guir fizianç
Da lakat barz em c'halon eun tammik esperanç.

31.

Ma c'halon zo evidoc'h, ma ene da Zoue
Demeuz he oll zecrejou me ra deoc'h an alc'houe,
Evit guelet peguen don ez eo gravet enni
Ar merk deuz ma amitie e kenver ho hini.

32.

Ma ne zon ket pinvidik o tonet d'ho koulen
Me meuz eur guir garantez hag eur galon laouen.
Ganin-me eo guel kavet eun amitie nerzus
Evit eur binvidigez d'am renta maleurus.

33.

Me gred ez eo red dan den kavet eun tam danvez,
Araog don da guimer pers barz ar briedelez ;
Mez kemen ze na vir ket hervez ma zantimant
Da breferi eur galon vad guel evit an arc'hant.

34.

Kemen e meuz ho karet, na gomprenfet biken
Ken vo rannet ma c'halon siouaz gant an anken ;
Neuze vo re zivead da zont da implori
Madelez an Outrou Doue evit ma c'honsoli.

35.

Salisset eo ar paper gant an daelou c'houero
Pere deuz ma daoulagad a gouez a verado.
Ma c'halon ebarz em c'hreiz, siouaz a zo souffrant
O skriva ar c'homzou man evidoc'h plac'h yaouank.

36.

Mar ve touchet ho kalon o klevet kemen-ma ;
Digasset din eur respont vit ma rejouissa :
Mar e ma ho santimant da zon d'am refusi
Digasset neuze unan evit ma c'honsoli.

37.

Cetu aze ar lizer a skriven d'am mestrez,
Da zevez pardon Sant Per patron deuz ma farez ;
Evit goulen diganti hag hi a voa kontant
Da veza dimet an daou ar blavez ma presant.

38.

Pevar mis zo tremenet abaoue ar zulvez
Meuz rentet ar c'homzou-ze tre daouarn ma mestrez ;
Breman eo skler da velet an amzer meuz kolet
O karout eur plac'h yaouank pehini n'am c'har ket

39.

C'hui a gompren, tud yaouank, ma foan ma rann-galon
O vel ma muia-karet va lez en abandon.
Me meuz kemen he c'haret, hag he c'harin ato ;
Ma c'halon a vo dezi betec fin ma deio.

40.

C'hui pere oc'h euz mestrez, oc'h euz bet diganti
Eur portret pe eur lizer evit o soulagi ;
Mez me n'em beuz bet netra gant va c'hontantamant.
N'em beuz met poan hag glac'har elec'h soulajamant.

41.

Ouspen unan en o touez an deuz ivez karet ;
Mez na gredan ve nikun evel-din glac'haret ;
Abalamour kalz ouzoc'h a gar meur a vestrez
Mar zeu unan d'ho refus ; c'hui pezo he farez.

42.

Mez me n'am beuz ket karet hag ne garin jamez ;
Nikun all n'ho ma c'halon nemet ma guir vestrez.
Goude kemen he c'haret ma c'halon zo rannet
Hag eun dristidiguez vraz zo deut var ma speret.

43.

Ah ! ma komprenfe an dud peguen trist e kavan
Teufe an dour n'ho daoulagad o klevet kemen-man ;
Mez allaz neuz nemedon ve capabl da gompren :
Ma c'halon a zo heb ken gouliet da viken.

44.

A red voa din ma Doue ! guel var he daoulagad
Eur zel ken karantezus araog don d'he c'huitad,
Pehini an deuz laket ken don barz em speret
An tan deuz he c'harantez keit ma vin var ar bed.

45.

Na rit ket henvel ouzin me o ped tud yaouank
Rag me vezo maleuvruz keit vin var ar bed man.
Vit beva var an douar heb kavet kalonnad :
Selaouet an avis man agredan a zo mad :

46.

AVIS

Mar oc'h sur da bossedi eun devez ho mestrez ;
Karet neuze anezi gant eur guir garantez ;
Mez dioualit d'he lakat re zon en ho speret
Gant aoun ho pezo glac'har pa vezot refuset.

47.

Mar ho peuz c'hoant da c'houzout hano an den yaouank
Pehini neuz komposet ar janson ma presant :
Ganet eo en eur guerik deuz a ganton Briec ;
Da zevez he vadiziant Nicolas oa hanvel.

48.

Cetu aze mignonet ar fin deuz ar janson
Pehini meuz komposet mantret braz ma c'halon ;
Azetet kichen eun dol e toulik ma frenest
Em meuz skrivet anezi vis a vis d'am mestrez.

NICOLAS P.

(Propriété réservée à l'auteur.)

AR JUSVEREZ

KONVERTISSET GANT HE MIGNON

VAR EUN TON ANAVEZET.

1.

Me meuz ho karet plac'h yaouank
Hag ho karin bepred ; *(bis)*
C'hui c'heuz plijet d'am zantimant
C'hui eo ar choaz deuz ar merc'hed.

2.

Mez siouaz din pe peuz anken
Dime eo red mervel ; *(bis)*
Deuit eo an heur d'ho tilezen
Deuit eo va Doue d'am guervel.

3.

Dont a rafot var ar menn be
Da bedi an Autrou ; *(bis)*
Evit mar plijo digante
Va delivra deuz ar poaniou.

4.

Allaz siouaz ne zongen ket
Ne voac'h ket kristenez *(bis)*
Hag ma Doue na entend ket
Peden dister ar Jusverez.

5.

Merc'han desert pe Jusverez
Selaouit ac'hanon. *(bis)*
Ma dorn ho kraio kristenez
Hag rouanez deuz ma c'halon.

6.

Sellit euz ann eol o vrilla
Azioc'h ar mene *(bis)*
Ton var ho tal d'ho penniga
Hag da gas ho peden d'an Ee.

7.

Recevet berad ha berad
An dour a vadiziant, *(bis)*
Hag c'hui vezo kristenez vad
Dre nerz santel ar zakramant.

8.

Eur groaz poset var ho kalon
A vezo ho Toue ; *(bis)*
Pedet anezi evidon
Hag ni en em gavo en Ee.

9.

Eur bloaz voa tremenet deja
Hag bemdez var ar bez *(bis)*
Var he daoulin hag o vouela
E vije guel ar Jusverez.

10.

Pa zeuaz Doue d'he goulenn
Da velet he mignon, *(bis)*
An hano ar Verc'hez kristen
A zigor an ee d'he c'halon.

11.

Cetu aze d'am zantiman
Eur garantez barfet, *(bis)*
A zo gleet da beb unan
Da gavet evit he bried.

12.

Cetu aze ar merk kaera
Euz ar fidelite. *(bis)*
Et in breman deuz ar bed-ma
D'ar baradoz gant an Aele.

NICOLAS P.

(Propriété réservée.)